


HEKLEV SEVENADUREL

	A-dreuz lenn	2
	Petra nevez ?	8
	Notennoù	24

Herve LATIMIER

Le nucléaire imaginé, Le rêve du capitalisme sans la Terre,
gant Ange Pottin,
La Découverte, 2024,
158 pajenn, 16€



Al levr-mañ zo sell ur prederour war ar greanterezh nukleel. Aes da lenn, sklaer ha leun a ditouroù, magañ a ra ar preder. C’hwec’h chabistr a gaver ennañ. « *Relances et défailances* » diwar-benn strategiezh a-vremañ Frañs.

« *Nationalisme technique et imaginaire énergétique* » gouestlet dreist-holl d’ar CEA (Komise-

riehz an Energiezh Atomek) ha da zoare soñjal an “nukleokratet”, dedennus-kenañ. Hunvre ur stumm da broduiñ energiezh distag diouzh an Douar peogwir e krouer energiezh diwar un darn eus an danvezioù a chom goude bezañ produet energiezh ur wech kentañ, un doare kelc’h en diavaez diouzh ar bed fetis : « ... adopter, afin de décrire le

monde, un point de vue situé nulle part, décorrélé de l'ancrage humain sur Terre et indexé aux grandeurs macroscopiques ou microscopiques étudiées par les sciences physiques » (pp.53-54).

« *Le projet du capital fissile* », liammet eo sell an nukleokrated ouzh ur raktres ekonomikel, evel-just : ur c'hresk didermen diazezet war un energiezh tost burzhudus. Koulskoude : « *Le projet du capital fissile repose sur une série de contradictions qui le rendent fort instable : entre rapatriement national et dépendances internationales, entre disponibilité immédiate de l'énergie et dysfonctionnements techniques, entre abstraction économique-énergétique et récalcitrance de la matière* » (p.78).

« *Le nucléaire imaginé et la diplomatie du capitale fissile* ». N'eo ket tout diorren un deknologiezh koustus spontus, ret eo klask he gwerzhañ ha krouiñ ur c'hoant da gaout anezhi daoust d'an aon bet krouet gant Hiroshima ha Nagasaki. Energiezh tost peurbad ha bremañ diskouezet evel "glas". Siwazh al liamm start etre nukleel sivil ha nukleel arme n'eus teñvalaet hunvre an nukleokrated : emled an armoù nukleel hep kontañ

kudenn ar restachoù skinoberius da verañ ha koust ar staliadurioù. Ouzhpenn ar staliadurioù a bep seurt-se a c'hell bezañ ur pal ma sav brezel...

Kontañ a ra « *Contester le capital fissile, rendre visible l'infrastructure irradiée* », penaos e krog bed empennet an nukleokrated da vezañ burutellet gant tud eus diabarzh ar greanterezh e-unan er bloavezhioù 1970. Taolennet e vez er chabistr-mañ perzh pouezus Sindikad CFDT labourerien an energiezh atomek. Lakaat a raent en a-raok an dañjerioù evit an dud hag evit an endro. Burutellañ a raent ivez an doare kapitalour da welet an araokaat. Diskouezet eo bet an doareoù fetis ma veze produet danvez al labourioù teorikel. Diskoachet eo bet gant labour ar sindikad « *Le mythe du système clos et indépendant qui invisibilise le travail de maintenance...* » (p.126). Echuiñ a ra ar chabistr war ar pezh a dremen e ledenez La Hague.


« *Les fantasmagories circulaires et l'héritage du capitalisme industriel* » eo titl ar chabistr diwezhañ. Bez' eo an nukleel skouer splann unan eus mojennoù diazezet ar gapitalouriezh « *Le "cycle du combustible ferme"* »

qui parachève le projet du capital fissile est l'un des noms de l'utopie écologique du capitalisme : celle d'une expansion économique et matérielle infinie, transformant les limites qu'elle rencontre en simples frontières surmontables grâce à l'ingéniosité humaine, inféodant la nature à la logique d'accumulation qui caractérise la valeur économique » (p.138). N'ankouaomp ket ez omp un darn eus an natur... Gwelet a reer

Land of Wolves,
gant Craig Johnson,
Penguin Books, 2020,
320 pajenn, \$17.00

Pell 'oa ne 'm boa ket lennet unan eus avanturioù Walter Longmire, sheriff kontelezh Absaroka er Wyoming. An diwezhañ barnadenn 'oa hini *A Serpent's Look* en niverenn 412 (Gwengolo-Here 2015). N'eus ket pell zo em eus lennet ur pennad a lâre e oa matkaer *Land of the Wolves*. Prenet ha lennet eta. N'on ket bet dipitet,

mat pegen touellus eo diskouez an energiezh nukleel evel "glas". Arguzennoù e-leizh a gaver en oberenn-mañ daoust ma c'hell ar c'heriaoueg seblantout un tamm souezhus er penn-kentañ. Sell divoutin ur prederour, diazezet war un anaoudegezh vat eus bed fetis an nukleel. Da vezañ lennet hag implijet...



pell ac'hane. Ne gontin ket an enklask polis evel-just. Kregiñ a ra goude marv ur mêsaer a rae wardro deñved Abaranne Extepare, ur rancher pinvidik. Kendelc'her a ra gant ur splujadenn en istor luziet ha feuls Extepare ha, dreist-holl, roll euzhus mab-kaer Abaranne, a wallgase e wreg, e vab ha marteze bugale all. Savet

mat eo an istor, gant tudennoù niverus ha darvoudoù e-leizh. Taolennet dreist eo an dud hag ar vro. Adkavout a reer ar bodad tud a ra “skipaih” Walt Longmire. Adkavout a reer an dave da Euskadi hag an euskareg peogwir ez eus kalzik Euskariz, m’ho peus soñj o vezañ graet o annez er Wyoming. Adkavout a reer an darempred don en deus Walt gant e vignoned henvroat. Marteze eo a-drugarez dezho, evit lod, en deus un darempred ispisial gant an natur hag ivez gant ur bed dreistnatur liammet

ouzh o sevenadur. Amañ e kaver roll ispisial ur bleiz bras a seblant e sikour hag e wareziñ. Un digarez eo al loen-se evit teurel ur sell war emzalc’h diboell an dud pa gomzer eus bezañs “bleizi” e menezioù ar vro.

Koshaet ha gwanaet eo Walt goude bezañ bet gloazet fall e-kerzh un enklask en deus kaset anezhañ da Vec’hiko. Koulskoude e chom barrek d’ober e labour...

**Pour en finir avec
la démocratie
participative,**
gant Manon Loisel ha
Nicolas Rio,
Textuel, rummad Petite
encyclopédie critique,
2024,
188 pajenn, 18,90€



Blaz an atahin a gaver e titl al levr-mañ kement ez eo diouzh ar c’hiz an demokratelezh perzhiañ. Gwelet eo evel un doare da bareañ « kleñved an demokratelezh ». Ha koulskoude...

Keleenn a ra Manon Loisel ha Nicolas Rio e Skol ar Skiantoù politikel e Pariz. E-pad un dek

vloaz bennak o deus kuzuliet strollegezhioù war ar gouarnerezh lec’hel. Skiant-prenet o deus eta. Gellout a ra bezañ digalonekaus an oberenn evit dilennidi a glask diorren an demokratelezh perzhiañ war an dachenn ha n’eo ket un diskoulm evito rak ne respont ket

da c'houlenn an dud. Danvez preder eta.

Pevar chabistr a gaver hag e pep hini rannoù berr gouestlet d'un dodenn. Setu o zitloù : « *La gueule de bois du renouveau démocratique* » ; « *La participation contre l'égalité démocratique* » ; « *De l'expression des citoyens à la capacité d'écoute des institutions* » ; « *Démocratiser l'action publique face à l'urgence écologique* ». An hini kentañ a ziskouez dreist-holl ez eo an demokratelezh perzhiañ evel ma vever anezhi bremañ ur mekanik da broduiñ disouezhenn ha santimant bezañ touellet. En eil hag en trede chabistr e kaver kendalc'h an daolenn negativel met hentoù kinniget ivez. An hini diwezhañ a zo gouestlet dreist-holl da ginnigoù evit gwellaat an traoù.

Da gentañ e vez pouezet war roll an dilennidi : « *Pour rendre l'action publique plus démocratique, ce n'est pas la place des citoyens qu'il faut interroger mais celle de leurs représentants !* ». Ezhommm zo eus kan-naded dilennet met ezhommm zo da reiñ e blas d'an dael. Ezhommm zo da adreiñ plas d'ar c'horfoù hanterour (sindikadoù, strolladoù, kevredigezhioù...) a zo

lec'hioù eskemm ha n'eo ket just un dastumad hiniennoù. Setu titloù un nebeud rannoù : « *Réhabiliter la fonction délibérative des élus* » ; « *Du pilotage de l'action publique à sa mise en débat* » ; « *Deux garde-fous pour rendre la délibération démocratique* » ; « *Faire entrer la négociation en démocratie* » ; « *La démocratie comme confrontation des intérêts divergents* »...

A-hed al levr e vez taolennet degouezhioù bevet gant an holl guzulierien-kêr (« *Les élus présents se retrouvent ensevelis sous une avalanche de textes à adopter, aussi techniques qu'hétérogènes* » (p.135). Cheñch an darempred gant ar servijoù, plas ar bihan-niver, dispartiañ ar galloud seveniñ diouzh penn ar vodadenn divizout, bodadennoù divizout gant ul lodenn a zilennidi hag ul lodenn a dud tennet d'ar sort, evit reiñ un nebeud skouerioù. Ne vo ket aes : cheñch ar reolennoù, cheñch ar boazioù ivez... Evit echuiñ, un darn eus gerioù diwezhañ an aozerien (p.184) : « *Conclure sur l'importance du représentatif n'a rien d'une défense du Statut quo. Au contraire ! Si nous proposons*

d'en finir avec la démocratie participative, c'est pour arrêter de faire diversion et remettre la question du partage du pouvoir au centre du jeu. »

Ur sapre chanter met talvezout ra ar boan delc'her kont eus ar prederiadennoù a gaver el levr, ha pa rankfer mont gorrek war hent ar c'hemmoù.

PETRA NEVEZ ?



**Loeiza an DUIGOU,
Herve LATIMIER &
Malo BOUËSSEL du BOURG**

**Ar paotrig dilu
teod-lemm,
Gant Mani Leib & El Lissitsky,
bzhg gant Koulizh Kedez
ha Bahia Baum,
An Treizher,
24 fajenn, 8€**



Ur bravig flour eo *Ar paotrig dilu teod-lemm*. Divyezhek yideg-brezhoneg eo ar gontadenn werzaouet-se. Ha ret eo d'al lenner kregiñ gant fin al levrig e-giz ma vez graet er yezh orin. Embannet e voe e 1905 evit ar wech kentañ. Mani Leib, an aozer (Niezhin, Ukraina 1883-New York 1953), a zivroas

d'ar Stadoù-Unanet, ma roas bec'h da vrudañ ar sevenadur yidek. El Lissitsky, ar skeudennaouer, a zo unan eus penn-araogerien an Arzoù-kaer e Rusia. Engravadurioù leun a varzhoniezh en deus strewet a-hed ar pajennoù, un tammig diouzh spered Chagall, en doa bet tro da

labourat gantañ er skol arzoù e Vitebsk.

En ur gêriadenn zistro, e-kreiz ar stepenn, ez erru gwall gant ar gumuniezh. Bevañ a rae an holl e peoc'h, yuzhevien ha kristenien « lod er boz, darn en dienez. » Ha joa forzh pegement gant ar vugale war ar foarlec'h. Deuet eo ar goañv, met er bloaz-se « ne ra ket erc'h, ket ur bluenn, » ha fank ha flaer e pep lec'h, un euzh. En em gavout a ra ur paotrig dilu teod-lemm gant un aotrou pintet uhel war e varc'h. Kinnig a ra d'ar paotrig ober un dibab : pe kemer e varc'h burzhudus, a oar redek ken buan hag ur saezh en avel, pe kemer e walenn hud... « Me a fell din marc'h ha gwalenn, » a respont ar c'hwiltouz...

Kan awenoù,
gant Nolwenn Korbell,
Coop Breizh,
184 fajenn, 17€

Souezhus eo adkavout testennoù Nolwenn Korbell en o noazh. Al lodenn vrasañ eus he

Ur bravig, a lavaren, rak ar peder fevaradenn ha tri-ugent a ya d'ober kontadenn *Ar paotrig dilu teod-lemm* am eus bourret ouzh o lenn hag adlenn a vouezh uhel. Savet int bet diwar werzennoù seizhtroadek, kement ha reiñ ul lusk lamm-dilamm, skañv ha nerzhus, d'an dezrevell. Koulizh Kedez en deus kemeret preder bras gant ar furm, just a-walc'h. Klotennoù diabarzh, kenganez, hesoniezh, lerterc'hadoù... Dibabet pervezh ar gerioù gantañ. Birvilh ha levenez a santer e-ser *Ar paotrig dilu teod-lemm*. Ur wech klasket un toulladig gerioù nebeutoc'h anavezet ganeoc'h, adlennit an destenn evit ho prasañ plijadur. Un oberenn dispar eo, ha kempred e meur a geñver.

MBdB



c'hanaouennoù am eus bet klevet meur a wech hag ar c'hanaouennoù zo tonket da vezañ

selaouet evel-just, dreist-holl a-berzh un arzourez ken klok : aozerez, sonaozourez, kanerez ha komedianez war ar memes tro. Met lenn an testennoù, an holl destennoù (pemp kanouenn orin hag hanter-kant, savet e brezhoneg, war-bouez unan bennak e saozneg pe e galleg), ha tra nemet an testennoù, a zo un doare da vont donoc’h marteze e-barzh kalon ar varzhez. Rak graet em eus anoudegezh gant ur varzhez wirion o lenn *Kan awenoù*.


Gant gwir abeg he deus lakaet ar ger “awen” el liester. A bep seurt mammenoù personel a gaver en torkad-mañ : karantezioù, stourmoù, kounnaroù, peragennoù, estlammoù... Liorzh ar vuhez, gant he bleunioù hag e spernoù. Mestroni a ziskouez Nolwenn Korbell en he gwerzaouiñ. Hesoniezh, lusk, klotennoù... En he bleud emañ. Intret eo he c’hanaouennoù gant faltazi, freskter, teneridigezh, mousfent ha fromoù melkoniusoc’h pe rangalonus gwezh ha gwezh all zoken.

Er ganaouenn « Ur plac’h a netra » e santer ar bladennad arlivioù-se dindan ur maskl skañv ha bugel. Gant « Bugaled Breizh », an emsavez eo a

glask dihuniñ he c’henvroidi : « Aet int d’ar vourc’h/ Da zeskiñ gerioù an estren ’lâre dezho “oant moc’h...” ». « Tiny song » am eus kavet dudius ivez. Ur ganaouenn savet e saozneg eo : « *Don’t give a bigger place to grey/let other colours paint your day...* » An testennoù brezhoneg ha saozneg a zo kinniget gant un droidigezh c’hallek, savet ake-tus gant Stefan Moal. *Kan awenoù* a zeuio da vezañ ur c’har-ned kanañ evit ar re a anavez ar sonerezh. Mod pe vod e voc’h intret gant ar werzenn-mañ pa vo serret al levr ganeoc’h : « Chom da gousket pe bout dieub/ Aze emañ an dalc’h, aze emañ an dibab. »

MBdB

Seiz,
gant Alessandro Baricco,
bzhg gant Serj Richard,
Al Liamm,
90 pajenn, 9€



Herve Jonkour, ur marc’hadour preñved-seiz eus an XIX^{vet} kantved oc’h ober monedoneoù etre Bro-C’hall ha Bro-Japan... ur bromesa d’ur veaj liesliv, neketa ?

O welet ar golo gant ur gaer a valafenn hag un titl da grediñ e oan o vont da zeskiñ diwarbenn an Istor Bras, e oa graet ma raksoñjoù, ha gortoz a raen kalzik digant al levrig-mañ.

Hon haroz a zo kenwerzher. N’eo ket ene ur barzh a zo gan-tañ, ha daoust ma treuz ur bern lec’hioù kenedus, ne chomer ket da varvailhat dirak braventez gweledvaoù ar bellvro, nag hini ar sevenadurioù all. Kontet e vez evelkent dre ar munud pegerent kaer eo annez Hara Kei, ar Japanad a werzho vioù da Herve Jonkour. Lakaet e vez war wel ur vaouez o vevañ en e lez. Ne ouier ket hec’h anv, ne

glever ket he mouezh, met Herve Jonkour a vag “karantez” eviti.

Etre mestrez ha gwreg, n’eo ket fall ar jeu evitañ.

An eil hag eben a zo prest d’en em reiñ, a gorf hag a spered (a gorf dreist-holl, rak n’eus ket amzer da goll gant o frederioù dezho... rhooo, hag an ingalded, emit-hu ?).

Adalek ar penn-kentañ e komprenner ton “mod kozh” al levr.

Displeget e vez e oa Baldadiou, kenlabourer ha mignon Herve, erruet e Vila Diu gant ar c’hoant sevel un nezadeg preñved-seiz, hag en em gavet e oa-eñ dirak ar maer. Diskouezet en doa ur skerb seiz dezhañ, ha setu an diviz a oa bet neuze :

« — Ha gouzout a rit petra eo ?

— Traoù maouezed.

— Fazi. Traoù gwazed : arc’hant. »

N’eo ket an div dudenn-mañ hepken, hag a roio ur plas dister d’ar vaouez, met al levr a-bezh.

« E dibenn miz Gouere e tilec’hias Herve Jonkour gant e wreg evit mont da Nissa. Ober a rejont o annezadeg en ur genkiz vihan war bord ar mor. Ar pezh he doa bet c’hoant Hélène, dre m’he doa lakaet don en he spered e c’hellfe sioulder ur digenvez dont a-benn da skañvaat imor velkonius a seblante bezañ kroget en he gwaz. Koulskoude e oa bet lemm he spered, lakaet he doa an dibab-se da dremen evit ur stultenn dezhi hec’h-unan, ha roet he doa d’ar gwaz a gare ar blijadur d’he fardoniñ. »

Ma n’oc’h ket bet lakaet diaes gant seurt linennoù, me ho ped, kendalc’hit gant al lenn...

An dudenn bennañ n’eo ket gwall zedennus. Etre e brenadennoù hag e werzhadennoù, n’eus ket a zonder d’ar garantez a vag evit an div vaouez en e vuhez. Ar skrid a laka ar merc’hed izel-izel, laouen da servij, dibreder ha suj.

E 2024 eo deuet poent embann un tammig muioc’h a zoujañs evit ar merc’hed, ha pa vefe en ur yezh yac’h ha dire-

bech. Ha peseurt plas evit ar gwaz ? Herve ne ra netra ispisial, ha mard eo kalonek a-walc’h da vont war an enezenn da vare ar brezel, n’eo ket soutiloc’h e ber-sonelezh eget hini ur par deuet da rastellaat e aour.


Ne viro ket outañ da vezañ un den dreist d’ar re all, ken ma vo desachet e amezeien gant e furnez dibar strinket a neblec’h : « Tud Vila Diu a zeske penaos e oa ar bed en ur selaou anezhañ, hag ar vugale a gomprenne petra e oa an estlamm. Kontañ a rae goustadik, en ur sellet en aer hag en amzer ouzh traoù na vezent ket gwelet gant ar re all. »

N’eo ket e kaven al levr skrivet fall, met ne oa ket ma c’halon o tridal gant pluenn Alessandro Baricco. Diwar an istor-mañ eo bet sevenet ar film *Silk* gant François Girard e 2007. Ha reiñ a ra ur sell all war an istor-mañ ?

An aktourien Micheal Pitt ha Keira Knightley, Okitania ha Bro-Japan an XIX^{vet} kantved ouzh ar skramm , sed aze ur film desachus !

LaD

Gwerz Denez,
gant Denez Prigent,
Ouest-France,
817 pajenn, 30€



Ur sammad a vez graet eus seurt pikol torkad. Labour ur vuhez. Soñjit 'ta, kant c'hwec'h gwerz ha tregont savet gant Denez Prigent, ouzhpenn 817 pajenn embannet e brezhoneg hag e galleg, ha moulet cheuc'h en ul levr goloet gant ur wiadenn c'hlaz-ruz, diginkl, war-bouez ul luc'hskeudennig eus an aozer. Trawalc'h da reiñ un astenn vev da neudenn hor barzhoniezh hengounel abaoe gwerzh Skolan. Alies em eus lennet gwerzennoù eizh silabenn Denez Prigent a vouezh uhel, evit santout lusk ar gwagennoù o vervel hag oc'h adc'henel dibaouez, peuzheñvel o gerioù, ken e vezer trec'het gant nerzh pennek al lanv oc'h aloubiñ traezhenn ar vuhez evel un tonkad didrugar. Frammet mat eo gwerzioù Denez Prigent. Ur senenn digeriñ hag ur senenn klozañ peurvuiañ, meur a zao-lenn etrezo gant lammoù pe

troc'hoù en dezrevell, kement ha plantañ tizh pe lakaat un tamm gwask war ar selaouer.

Souezhet on bet koulskoude gant danvez ar gwerzioù a lennen, unan-hag-unan. N'eus nemet an hini gentañ, « Gwerz Kiev », hag a bled gant darvoudoù kempred. Eus an *holodomor* ez eus kont, an naonegezh vras-se bet mennet hag aozet gant Staline en Ukraina, ma varvas 5 million a dud dre e wall etre 1932 ha 1933. Kement-se en deus degaset da soñj din eus gwerzioù ar *Barzhaz Breizh* evel-just, rak ul lodenn vras anezho a zo bet awenet gant fedoù gwir ha dramaek, bet skoet memor ar bobl ganto, diouzh en deus diskouezet enklaskoù Donatien Laurent.

N'eo ket an hent-se en deus dibabet Denez Prigent neuze. N'eus ket anv en e werzioù eus stourmoù Breizh a-vremañ. Dre zoareoù gwengelouriel hag

anamzerel eo e liv ene Mab-den. E bed marvailhus hor mojennoù kozh e kav e awen. An Ankoù, ar gwrac'hed, an aeled, an hudourien a nij a bajenn da bajenn. Komz a ra al loened evit lakaat an dud war evezh, met ne vezont ket klevet siwazh. Furnez ha follentez an dud eo a vez taolennet, ha taolennet brav. O c'hoantegezh, o zechoù fall hag o vertuzioù... Alese gwalleurioù bras. Ar re gablus a vez kastizet kriz ! Puihañ a ra an tudennoù toull-

gofet, taget, dibennet, didammet, krouget, devet... Intret eo an dezrevelloù gant talvoudegezhioù harozel ha speredel. Kalonek ha brogarour eo soudarded Breizh war an dachenn emgann. Brav ha bev eo ar skeudennoù. Ur barzh gwirion eo Denez Prigent. Met plijet e vijen bet o lenn muioc'h a bezhioù savet diwar batrom « Gwerz Kiev » avat, evit nevesaat ha kreñvaat al liamm etre an hengoun hag an amzer-vremañ.

MBdB

Kambr va zonton Youn,
gant Goulc'han Kervella,
Skol Vreizh,
104 fajenn, 9€



Ur romantig hep e bar eo *Kambr va zonton Youn*. Un istor gwir eo. Savet en deus Goulc'han Kervella e zezrevell diwar meur a vouezh. Mouezhioù ar re o deus anavezet Tonton Youn, an dudenn nemeti na vez ket roet he mouezh da glevout, just a-walc'h... Aet eo ar paourkaezh Youn da Anaon. Kregiñ a ra ar

romant gant keloù e varv, e 1958, pell diouzh bro e gavell, e Pithivier, bro ar sukr. Amsklaer eo degouezhioù an drama. En ur poull-dour eo bet kavet e gorf. Gwallzarvoud, muntr, emlazh ? Den ne oar ha den ne ouio. Intret eo ar romant gant kevrin an tonkad kriz-se. Treiñ a ra

komzoù ar re vev en-dro da dav an hini marv.

Kriz e oa bet buhez Youn. Ganet e oa e 1914 er Vro-Bagan. Dimezet e oa bet, met marvet e wreg en ur wilioudiñ. N'en doa ket treuzvevet ar c'hrouadurig ivez. Ha kouezhet Youn er boeson hag en dizesper. Dre vuhez Youn, e-ser e familh hag e vignoned, e veajer er prantad amzer ma oa yac'h-pesk ar brezhoneg c'hoazh, daoust ma oa kroget da gilañ dirak touell ar c'hêrioù bras ha nerzh ar bignerez sokial gall. Bed al labour kalet hag ar genskoazell a ziskouez an aozer. Micherioù ar c'hêrioù, micherioù ar mor hag an douar.

Hag an divroañ rannvloaziat, war ar marc'had, kement ha lakaat un tamm kaol e soubenn an tri zraig. A-lazh-korf e veze kiet.

Gant ampartiz ha mestroni en deus gwiadet Goulc'han Kervella e ballenn. Klotañ a ra mat ar gwrioù pedagogel gant ar gwrioù lennegel. N'eo ket distag deskriv buhez diabarzh an dud diouzh doareoù o micher, en enep d'ar pezh am boa santet e testennoù all. Unan eus levrioù gwellañ Goulc'han Kervella eo *Kambr va zonton Youn* neuze da'm soñj. Un testeni talvoudus ha fromus.

MBdB

**Kofez ur muntre
dezrevellet en un
nozvezh,**
gant Joseph Roth,
bzhg gant Gérard Cornillet,
An Alarc'h Embannadurioù,
184 fajenn, 13€



Joseph Roth (1894-1939) a zo ur c'hazetenner hag ur skri-vagner aostriat-hungarat, bet ganet en ur familh yuzev, ken e rankas kuitaat Berlin, ma

laboure evit ar *Frankfurter Zeitung*, da gaout repu e Pariz, ma vevas evel harluad adalek 1933 betek e varv en ur stad gwall reuzeudik. E 1936 e voe emban-

net *Kofez ur muntre*. E-ser an aozer e reer anaoudegezh gant Semion Goloubtchik en un davarn. Ha klevout a reer, en ur ober un nozvezh, dezrevell vuhez ur spier lakaet da “vuntre” gant pratikoù zo. Maleürus eo bet Goloubtchik a-hed e vuhez. Ne fell ket plegañ d’e blanedenn zister. Labougarzh ar priñs Krapotkin eo. Met hemañ ne fell ket dezhañ anavezout e vab ez-ofisiel. Re a gKrapotkined a vefe e Rusia ma rankfe anavezout e holl vastarded... Goloubtchik ne deu ket a-benn da drec’hiñ ar c’hloaz narkisek-se. Sammet eo e spered gant an avi, ar vezh, ar vrasoni hag ar gasoni. Dont a ra da vezañ ezel eus polis kuzh ar Tzar Nikolas II, an Oc’hrana. Prest eo da werzhañ, da dreitourañ ha da gas d’ar c’harc’har n’eus forzh piv pa grog ar c’hoant sevel ennañ, ha pa vefe diwar-goust un den mat ha dire-bech. Goloubtchik a dalvez “koulmig”, biskoazh c’hoazh evit un den ken dañjerus ha doñjerus. Kouezhet eo e karan-tez gant Lutetia, anezhi ur plac’h skañv ha dispignerez. Boureviet eo ganti.


Un istor kriz ha du, pa vo lavaret, a gas ar benndudenn

betek ar c’hoant lazhañ... N’eus didorr ebet da boanioù un ene trelatet. Ur splujadenn istorel, sokial ha bredoniel a-feson a ginnig deomp Joseph Roth. Studiañ a ra orin an droug ha livañ a ra doareoù e nerzh didrec’hus. Un heklev, moarvat, eus an euzh a oa oc’h aloubiñ Europa. Diaes eo d’al lenner mirout a vegañ truez evit Goloubtchik avat, na pegen drouk ha kinek e ve. Didro ha gwirion eo e gofez, ha diaes eo chom digas dirak gwander un den gloazet, trec’het gant e wallyouloù. Reuzied ha bourev war ar memes tro...

MBdB

**Notennoù d'ar Geriadur
Brezhoneg-Galleg
ar Gonideg,**
kempennet ha kinniget
gant Herve Sebille
Kernaoudour,
An Alarc'h Embannadurioù,
dastumad Glad ar Yezh,
324 fajenn, 32€

Ur levr souezhus eo an torkad notennoù yezh-se, bet enskrivet a van da van gant Frañsez Vallée, Auguste Etienne ha Jakez Mari Bourdellez war pajennoù geriadur Brezhoneg-Galleg ar Gonideg. Un hengoun didroc'h, pa soñjer er spise'herioù a vez kavet war hon dornskridoù koshañ... E vad en doa graet Vallée eus an notennoù-se a-benn sevel e *Dictionnaire du breton du Trégor-Goëlo et de Haute Cornouaille* (embannet evit ar wech kentañ gant *An Alarc'h* e 2014, kinniget gant Herve Sebille Kernaoudour c'hoazh). Met kalz kavadennoù ouzhpenn am eus graet el levr nevez-se. Fromus eo gwelout labour an dud kar-o-yezh, tud desket anezho, o klask renabliñ dre ar munud teñzorioù hor yezh, ken evit he mirout, pizh ha pervezh, ken evit he zreuzkas d'ar rummadoù da zont. Abaoe



kantvedoù ez eo al labour geriaoua un ober a-stroll e Breizh. Se a zo kaoz ez eo ken fonnus ha ken pinvidik hor geriadurioù hiziv an deiz. Ar geriadurioù kozh, hini ar Gonideg pergen, a dremene a zorn da zorn, evit ma c'hellfe pep hini klokaat, ledanaat ha spisaat labour e zia-gentidi, betek resisaat anv ar barrez ma oa bet pennaouet ar ger-mañ 'r ger.


Diwar korpus an notennoù-se en deus sevenet Herve Sebille Kernaoudour ul labour skiantel peurlipet, war roudoù Gwenole ar Menn. Goude bezañ degaset ditouroù hag evezhiadennoù diwar-benn an aozerien hag o mod da labourat, e kinnig deomp div c'heriaoueg, an eil hini bet savet diwar notennoù Vallée hag Etienne, hag eben diwar notennoù Jakez Mari Bourdellez. Beleien e oa Etienne ha Bourdellez. Kustum e oant

da lenn ha da skrivañ brezhoneg, tra ma choment tost-tre da yezh ha da rannyezh ar c'humuniezhioù lec'hel a vevent enno, d'ur mare ma ne zeue nemet brezhoneg gant an dud war ar maez e Breizh-Izel. Gwelloc'h kannadourien eus ar brezhoneg ne vije ket kavet neuze evit sevel ur pont bleuniek etre ar yezh lennek ha yezh ar bobl. E-giz ma skriv Herve Bihan en

e rakskrid, « ar geriadurioù, ouzhpenn renabliñ gerioù pe troiennoù, o deus ur roll bras en normalizadur ar yezhoù. Seul bouezusoc'h evit ar brezhoneg hag ar vrezhonegerien dre ma kinnigont ur reizhskrivadur, un norm bouetaet gant birvilh ar rannyezhoù, hag ivez ul liamm strizh etre yezh skrivet ha yezh komzet. »

MBdB

**Prezegenn a-zivout ar
sujidigezh youlek,
gant Etienne de La Boétie,
An Amzer Embanner,
95 pajenn, 12€**



« Ar bobl an hini eo en em yev hec'h-unan... » Setu tezenn greiz Etienne de La Boétie, ur paotr ha ne oa nemet triwec'h vloaz pa skrivas e destenn vru-detañ : *Prezegenn a-zivout ar sujidigezh youlek*. Ha d'en em c'houlenn abalamour da betra e tegemer ar bobl ar sujidigezh ha perak e kenlabour an dud gant an tirant evel sklaved eürus. Peadra da vezañ souezhet : « n'eus nemet un dra n'o deus

an dud tamm nerzh ebet da c'hoantaat : ar frankiz an hini eo. » Ha koulskoude, hervez la Boétie, ma vefe nac'het asantiñ e kouezhfe galloud an tirant en e boull ken aes ha tra : « Bezit mennet da baouez da servijout ha setu c'hwi digabestr. »

Ur monumant eo deuet da vezañ La Boétie e bed ar mennozhioù. Dre al levr-se, embannet e 1576, eo deuet Montaigne da vezañ mignon bras gant la

Boétie. Gandhi, Lamennais, Marin Luther King a zo bet awenet gantañ. David Thoreau en deus goveliet meizad an disentidigezh keodedel goude bezañ lennet e levr. Ha gwir eo ez eo skedus e brezegenn.


Diskouez a ra an aozer penaos e kemer harp an tirant war un toulladig lakizien hag a gemer harp, d'o zro, war lakizien a renk izelañ, hag adarre betek ma vo ar bobl en he fezh e servij an tirant. Met ar bobl, perak n'en em sav ket a-enep an tirant ? Peogwir ez ankounac'h he frankiz buan-ha-buan, evel ma vije un disamm dezhi.

« Digredus eo gwelet penaos, kerkent ha lakaet da vezañ yevet, e kouezh ar bobl ken don en ankounac'h eus he frankiz ma n'hall ket mui dihuniñ evit hec'h adkavout. » An aon, ar c'hoantegezh, al lubanerezh a ro un tamm skoazell ouzhpenn d'an tirant. Hennezh a oar « genaouegiñ e sujidi »... Bara ha c'hoarioù, kea...

P'edon o lenn prezegenn la Boétie e soñjen e Breizh eveljust. Arguzennoù La Boétie, an holl anezho pe dost, 'm eus aon, a glot gant stad ar bobl amañ e Breizh. Ur gentel da brederiañ...

MBdB

Toull Kerliv,
gant Charlie Grall,
Al Lanv,
130 pajenn, 10€



Eus un dezrevell vuhez, kentoc'h eget eus ur romant, ez eus anv gant *Toull Kerliv*, levr diwezhañ Charlie Grall. Lennet em eus al levrig-mañ en un tennad, en ur ober div eurvezh.

Ur stumm lennegel en deus roet Charlie Grall d'e skrid, met ar fedoù a vez astennet ar gaoz warno a seblant bezañ bet bevet da vat gant an aozer, evit al lodenn vrasañ anezho d'an

nebeutañ, en desped d'an notenn digeriñ ma resisa ar skriva-gner gant ur mousgoap c'hwerv en deus ijinet pep tra. Bezet pe vezet, liv ar gwirheñvelled, hag ar wirionez zoken, a zo war an destenn-mañ. Neoazh, ar Breton (dizant eo ar benndudenn ma n'eo ket dianavezet) a c'hellfe bezañ nep emsaver, hag ar varnerez, nep barner. Diouzh un tu ar stourm evit Breizh, diouzh an tu all, ar Stad c'hall gant he justis hag he folis.

Diwar ur c'hendegouezh gwaleürus e vez harzet ar Breton gant beg e dog hag aterset gant ur varnerez yaouank. Ur c'horf marv zo bet kavet e dour mengleuz Toull Kerliv. Nepell edo ar Breton o pesketa an deiz-se. An den marv a oa bet ezel eus an FLB gwechall, evel ar Breton, ha kenlabouret en deus gant ar polis gall abaoe. Alese an diskred, an douetañs, an tamalloù... Toullbac'het eo an tamallad e Fresnes e-pad an imbours'hadur, da c'hortoz e brozez. Anat eo an afer evit ar varnerez : kablus eo ar Breton. Dre o c'hendivizoù e tiskouez Charlie Grall daou stumm prederiañ digembezus¹ : an ideologiezh c'hall ha mennozhioù diazez difennerien Breizh. En em zifenn a ra mat ar stourmer kozh, das-
1 Digembezus : *incompatible*.

tumet skiant ha furnez gantañ gant an amzer, en desped da widreoù, da vec'hioù ha da c'hourdrouzoù ar varnerez.

Ur framm gwevn hag ampart en deus kavet Charlie Grall da sevel e skrid : test e vezer eus an atersadennoù war-eeun, ha lenn a reer al lizhiri bet skrivet gant ar Breton d'e vuiañ-karet etre div atersadenn. Dre al lizhiri-se e tegas soñjoù all ha displegadurioù n'hell ket diskuliañ d'ar varnerez. Un doare da ziskouez e vuhez diabarzh eo, e fromoù, e garantez, doareoù denel ar stourm. Diaes eo evit ur c'houblad gouzañv kement a viloni en ur chom seder. Erfin e vez lakaet anat o deus klasket ar boliserien merañ ar Breton, o reiñ da gompren dezhañ e chomo kablus e vuhez-pad ha ne gavo renoz ebet ma ne genlabour ket ganto. Etre venjañs ha drouktunañ... Chom a ra ar Breton sonn en e sav avat. Met ur priz uhel en do da baeañ...

MBdB

**Israël, Le piège de
l'Histoire,**
gant Gérard Araud,
Taillandier,
202 bajenn, 18,50€



N'eus ket kalz ac'hanomp ha n'int ket nec'het bras gant ar pezh a zegouezh e Palestina abaoe miz Here 2023.

Daoust din bezañ ur skoazel-ler eus stourm Palestinianiz evit kaout ur Stad dezho, n'on morse bet a-du gant ar re a felle dezho boutañ kuit ar Yuzevien. Diaes spontus eo kaout un ali kempouez war ar saviad spontus-se. Dedennet on bet pa 'm eus gwel-let levr Gérard Araud e ti Gwalarn e Lannuon gant ar meneg « Kavet mat gant ho levrdir ». N'on ket bet dipitet.

Labouret en doa Gérard Araud e kannati Frañs en Israël er bloavezhioù 80 ha distroet eo evel kannad ar wech-mañ etre 2003 ha 2009. Anavezout a ra mat ar vro eta. Leun a arlivoù eo e sell ha desket e vez ur bern traoù. Deskrivañ a ra ar saviad abaoe staliadur ar sionourien gentañ e Palestina e penn-kentañ an XX^{vet} kantved. E 1890 e oa e

Palestina dindan beli Turkia 18 000 Yuzev, 52 000 Kristen ha 446 000 Muzulman en ur vro baour. E 1914, 37 000, 80 000 ha 595 000 (p.95). Bremañ, war un dachenn peuzheñvel, e kaver 7 milion a Yuzevien hag 8 milion a Balestinianed. Un arouez e-touez re all eus ar cheñchamantou c'hoarvezet... Krouidigezh Stad Israël gant Bodad Meur ar Broadoù Unanet d'an 29 a viz Du 1947 he deus degaset ar c'hemm brasañ evel-just. Ma 'z eus bet emgannoù a-raok ez eo adalek an Nakba ("Gwallreuz", ger implijet gant ar Balestinianed evit envel ar prantad m'int bet skarzhet gant ar Stad nevez eus o bro e 1948) ma krog ur brezel dizehan etre Israël hag ar Balestinianed "skoazellet" gant ar Broioù Arab. Mesket e vez el levr eñvorioù personel ha dielfennadurioù. Pinvidik eo ar meskaj-se. Gellout a ra diskouez ur seblant dizurzh met ar fed e

vefe savet gant pennadoù berr gouestlet d'un dodenn resis a laka an oberenn da vezañ lennet aes. C'hwec'h lodenn a gaver. Ar beder diwezhañ zo, marteze ar re bouezusañ evit kompren stad an traoù : « *Israël au piège de la force et de la prospérité* » ; « *Le conflit* » ; « *Les obstacles à la solution des deux Etats* » ; « *Un espoir quand même ?* ». Pa geñveria Gérard Araud Israël er bloavezhioù 1980 hag an hini a-vremañ e weler ar c'hemmoù o deus gwasaget an traoù : trec'h ar sionouriezh a zehoù pa n'eo ket eus an tu dehoù-pellañ, tremenet Israël eus un aozadur kentoc'h laik ha sokialour d'un aozadur frankizour ha levezonet spontus gant ar relijion strishañ, deuet Israël da vezañ ekonomiezh kreñvañ ar rannved ha Tsahal ar galloudusañ arme. Donedigezh *sefardim* eus ar broioù Arab ha Yuzevien eus Rusia a zisplegfe un darn eus an emdroadur-se.

Er chabistr « *Israël au piège de la force et de la prospérité* » e kaver nouspet skouer eus an emdroadurioù-se hag eus an emzalc'h e-keñver ar Balestianed o chom en Israël. O komz eus ministred zo ec'h implij an aozer gerioù evel « *Bezalel Smotrich, ministre des finances,*

se dit lui-même suprémaciste juif et réclame la création d'un Etat théocratique soumis à la loi juive. Il multiplie les déclarations racistes », « *Itamar Ben-Gvir, ministre de la Sécurité nationale, encore plus extrémiste – fasciste, ce qui n'est pas abuser de l'étiquette – [...]* » (p.82). Pelloc'h (p.188) : « *Oui, le fascisme et le racisme ont désormais pignon sur rue en Israël ; les partis de gauche ont pratiquement disparu de la scène politique ; le pays des kibboutzim est devenu un des plus inégalitaires au monde, le judaïsme acquiert tous les défauts d'une religion officielle.* »

Siwazh, eus tu ar Balestianed n'eo ket gwelloc'h : dizemglevioù spontus, breinadur ar bolitikerien, divarregezh da gemer divizoù poellek pa oa posupl ; rannoù o klask distruj ar spioù bihan a beoc'h (s.o. Emglevioù Oslo) ha barrek d'en em glevet *de facto* gant Netanyahu evel en deus graet Hamas evit skarzhañ ar Fatah eus Gaza. Trec'h eo bet an islamourien war ar skourroù all, gant o doareoù feuls, kriz, enep demokratek ha strizh, da stourm hag o doareoù enep demokratek ha strizh da ren war tud Gaza.

Aet int betek degas war o fobl kounnar diskiant Israël dre torfed euzhus ar 7 a viz Here 2023 o lakaat anezhi da c'houzañv ha da c'hellout bezañ distrujet...

Kavet e vez titouroù ha dielfennadurioù diwar-benn politikerezh Frañs, hini ar Stadoù-Unanet, hini ar "gumuniezh etrebroadel". Pilpouzerezh ar Stadoù arab a ra van harpañ ar Balesinianed met a oar en em glevet gant Israël hep o menegiñ (emglevioù Abraham). Ma ouzhpennet c'hoari Bro-Iran e tegaser luziatez d'ur saviad luziet dija.

Goulenn a ra Gérard Araud chom hep ober dave d'ar "gwiurioù istorel". N'eus fin ebet d'an tabutoù war seurt danvez. Kavet em eus er bajenn 90 frazennoù dedennus : « *Lorsque les Russes se sont emparés de la Crimée en 2014, ils n'ont pas manqué de le justifier par leurs prétendus "droits historiques" [...] la Crimée n'était russe que depuis 1783, et je m'étais demandé pourquoi s'arrêter à cette date. [...] La même question peut se poser à travers toute l'Europe. Quels sont les droits historiques sur l'Alsace, sur la Silésie etc ?* »

An div bobl zo er gêr e Palestina, ur fed eo. Hag-eñ e savo eus an daou du tud kalonek

ha fur a-walc'h evit klask un diskoulm ? Hag-eñ e pouezo da vat ar "gumuniezh etrebroadel" war an enebourien ? Diaes kaout spi : « *Islamistes palestiniens et nationaux-religieux israéliens partagent la même conviction de servir Dieu, la même détermination à nier les droits de l'autre et le même refus de tout compromis. Depuis le 7 octobre, à la sauvagerie des premiers répond d'ailleurs la brutalité des seconds* » (p.163). « *Un espoir quand même ?* » eo titl ar chabistr diwezhañ koulskoude...

Kentelius-kenañ, sklaer hag aes da lenn, titouret mat ha kempouez eo an oberenn. Un diazez evit eskemmoù plaen (ma 'z eus tu) war ar pezh a dremen er rann vihan-se eus ar bed ken pouezus evit relijionoù al Levr.

Er fin e kaver, goude ur roll deiziadoù pouezus, ul listenn levrioù da lenn e-lec'h al levr-lennadur boas. Ur mennozh mat.

E-keit ma oan o skrivañ e varve milieroù a dud dindan ar bombezennoù e Gaza...

« *Aet eo e traoñ va enebourien, rivinoù peurbadus !*

O c'hêrioù hoc'h eus dismantret, distrujet ar soñj anezho » Salm 9-10, gwerzenn 7.

HL

NOTENNOÙ



**Annaig KERVELLA,
Herve LATIMIER &
Jerom OLIVRY**

PROFOÙ

Miz Even : Huguette GAUDART ; Emil GRANVILLE ; Herve AR GALL ; Milio LATIMIER ; Laurence LAVRAND ; Sylvie AR MOAL ; Yann-Varc'h COCHET ; Pierre-Emmanuel MARAIS ; Marie-Rose PIPET ; Mikael ROUBY

— War un dro : 100€

Miz Gouere : Jean BOULBRIA ; Andrev HODAYE ; Jean-Pierre FOUILLE

— War un dro : 90€

Miz Eost : Jean-Claude LE THOMAS ; Gweltaz ADEUX ; Drian BERNIER ; Loik CHAPEL ; Jean-Michel MAHE ; Yves MERVIN ; Per LAVANANT ; Michel LESCOP ; Alan ER HOULVENN

— War un dro : 196€

*Mil drugarez a lavaromp ur wech ouzhpenn
d'hor skoazellerien.*

100 VLOAZ GWALARN

E 2025 e vo lidet 100^{vet} deiz-ha-bloaz krouidigezh *Gwalarn*. Pa vez kaoz eus *Gwalarn* e soñjer diouzhtu e skrivagnerien veur al lennegezh vrezhonek met ankouaat a reer buan ar pep pouezusañ : al lennerien. « Hep lennerien, lennegezh ebet » a c'hallfemp lâret...

Setu perak en deus divizet skipailh *Al Liamm* reiñ ar gaoz deoc'h. Displegit deomp peseurt skrid embannet gant *Gwalarn* (romant, danevell pe c'hoazh n'eus forzh peseurt barzhoneg pe studiaden embannet er gelaouenn) a blij deoc'h ar muiañ !

Kasit ho skrid (1500 sin d'ar muiañ) a-raok an 31 a viz Mae 2025 da : skridou@alliamm.bzh. Embannet e vint en un niverenn gouestlet da Walar e 2025. Hervez an niver a skridoù resevet e vo graet un dibab, ar re all a vo embannet war hol lec'hienn.

CHOMADENN E ROC'H-GORED

D'an 23 a viz Gwengolo e oa bet roet lañs da eil chomadenn skrivagnerien aozet gant *Al Liamm*. Paskal Hervio hag Anaïs Le Ruyet-Mahé a oa emgavet e Roc'h-Gored evit labourat war ar skrivañ e-pad div sizhun klok.

Evel e 2022 eo bet degemeret ar skrivagnerien gant skipailh an IPPA (*Îles et Phares du Pays des Abers*) en tour-tan.



Siwazh n'eus ket bet tu da Anaïs Le Ruyet-Mahé chom gwall bell war ar roc'h evit abegoù familh ha chomet eo Paskal Hervio en e-unan an darn vrasañ eus ar chomadenn.

D'ar Gwener 4 a viz Here en doa-eñ degemeret un ugent den bennak evit komz gante eus e vuhez e-pad an div sizhunvezh war ar roc'h, ha diskouezet disoc'h e labour dezho.

Kaer e kavomp aozañ seurt degouezhioù evit hor skrivagnerien ha spi hon eus e c'hallo Anaïs kemer perzh da vat en hini a zeu !

SIKOUROMP DIWAN ! _____

Brudoù a rede ur pennadig zo a-zivout diaesterioù Diwan. Lakaet eo bet sklaer an traoù d'ar 5 a viz Gwengolo e-kerzh emgav kelaouiñ an distro-skol (s.o. Le Télégramme, ar 7 a viz Gwengolo). Disklêriet en deus Yann Uguen, prezidant ar rouedad, e vanke 500 000 euro evit ma vefe kempouez budjed 2024 Diwan. Ma ne laka ket ar gevredigezh en arvar evit ar poent, ez eo nec'hus-bras memes tra. Budjed bloaziek Diwan Kreiz a dizh 6,20 milion a euroioù (war-dro un drederenn eus budjed hollek ar rouedad). Ouzhpenn 360 a dud a vez gopret gant Diwan, war-dro un hanter anezho gant Diwan Kreiz hag an hanter all gant ar skolioù. Arabat ankouaat e kemer ar Stad e karg ar gelennerien nemetken. Ur skouer : en Télégramme, d'an 21 a viz Gwengolo, e lenner e vank 113 000 euro da skolaj-lise Gwened evit echuiñ ar bloaz. Goût a ouzer mat pouez Diwan er vro hag e levezon war sistem an deskadurezh en e bezh. Un nebeud strollegezhioù lec'hel o deus divizet dija sikour ar rouedad. Mat-kaer eo met ne vo ket trawalc'h evit stouvañ an toull ha sikour Diwan da soñjal siouloc'h en e raktresoù diorren. Ma ro pep hini ac'hanomp ur gwenneg bennak d'ar rouedad skolioù dre soubidigezh, e c'hellimp sikour anezhañ ha diskouez e chom ar c'henskoazell unan eus perzhioù ar Vretoned.

Diwan : www.diwan.bzh ; ZA Sant-Errnel 29411 LANDERNE Cedex ; 02 98 21 33 69.

PRIZ PER-JAKEZ HELIAS

E Kêr-Vegerel (e Ti al Levr) e oa bet aozet un emvod d'ar 6 a viz Here 2024 da reiñ prizioù lennegel.

Unvaniezh Skrivagnerien Breizh he deus loreet skridoù brezhonek, gallaouek ha brezhonek.

Da Iwan ar Fur eo bet roet priz kentañ ar romant brezhonek, evit e levr dedennus-kenañ *Kañv ha diskañv* (bet embannet gant *Al Liamm*). An eil priz a voe roet da Loeiza an Duigou evit he levr kaer *Tan de'i* (bet skeudennaouet gant Anna Duval-Guennoc, bet embannet gant *Al Liamm*).

Un trede priz a zo bet degemeret gant Jorj Abherve-Gwengen evit *Ribin-diribin* (romant dudius bet embannet gant *An Alarc'h Embannadurioù*).

Profet e voe prizioù d'an aozerien danevelloù :

1/ « Hiviziken » gant Fulup Plouzane.

2/ « Kernitron ar Gerioù kollet » gant R. J. Kernoa.

3/ « An diankadenn » gant Gwenola Gérard-Sez nec.

Embannet e vo unnek danevell vrezhonek en un dastumadenn divyezhek, gant ar skridoù bet savet e galleg hag e gallaoueg. Plijadur 'oa bet gant an arvesterien niverus o klevet al loreidi o lenn un darn eus o skrid.

War lec'hienn ar gevredigezh e c'hallit dizoleiñ dodenn ar genstrivadeg aozet evit 2025. Gant ma vo niverusoc'h c'hoazh ar re a gemero perzh er c'henstrivadegoù brezhonek !

Thierry Châtel, kadoriad strollad-barn brezhonek an A.E.B.



Abaoe ur pennad e ouzer ez eus diaesterioù bras gant Coop Breizh. Abaoe un toullad sizhunvezhioù n'hell ket ar gevelouri paeañ ken he c'hredourien. Dindan adreizhadur barnerezhel emañ abaoe ar 17 a viz Gwengolo. Ur c'heloù fall met ur spi da vezañ sikouret da adreizhañ he mont en-dro. Holl embannerien Vreizh hag ar re vrezhonek dreist-holl a oar pegen prizius eo ar skigner evit gwerzhañ o levrioù. Bezomp war evezh ha hetomp da gCoop Breizh kavout an diskoulm a zigoro dezhi un hent nevez.

LID KOLIER AN ERMINIG

Dalc'het eo bet al lid e Argentred-ar-Genkiz d'ar Sadorn 5 a viz Here. Un degemer a-feson a zo bet graet d'an dud, deuet niverus betek sal vras ar Greizenn Sevenadurel.

A-raok mont tre er sal en deus ar Bagad Dor Vras sonet meur a don. Kinklet e oa ar sal gant oberennoù Pascal Jaouen, broder ha krouer dilhadoù, paeron al lid ar bloaz-mañ. Kaset eo bet al lid en-dro, e brezhoneg hag e galleg, gant Sten Charbonneau.

An aotrou maer, Jean-Noël Bévière, en deus displeget e youl hag e zibaboù, sklaer ha tomm e vennozhioù war yezhoù ha sevenadur Breizh. E 2015 e oa bet sinet « Ya d'ar Brezhoneg » gant ar gumun, hag un hentenn divyezhek a zo er skol publik.

Tro o deus bet ar pevar loread da zisplegañ o hent, o oberiantizoù gant fent, kred pe foug. Fromus-kenañ eo bet al lid da vare roi-digezh ar c'holier da Irène Frachon gant Lena Louarn. Pevar den a oa bet erminiget er bloaz-mañ neuze :

- Saig Jestin, bet kelenner e skol al labour-douar ha maer Poullouran ha bet krouet gantañ Skol ar C'hleuzioù. A-drugarez dezhañ ez eus bet adsavet ur bern kleuzioù ha miret e vije distrujet lod eus bravañ takadoù chomet gouez e Breizh. Aozet en deus ivez gwenodennoù evit ar valeerien.

- Lukian Kergoat, kelenner ha rener ar rann geltiek e Roazhon 2 eo bet. Meur a levr en deus lakaet embann war ar c'hrennlavarioù. Labouret en deus war dafar pedagogel Diwan evit an eil derez ha krouet *Kreizenn ar geraouiñ*. Gant servij ar brezhoneg en deus labouret war an anvioù-lec'h hag ar panellerezh e brezhoneg.

- Irène Frachon. Mil anavezet eo-hi bremañ goude m'he doa kaset da benn ur stourm hir a-enep labourva Servier a skigne al louzoù Mediator kiriek da varv meur a zen. E 2010 he doa lakaet embann ul levr : *Mediator 150 mg, combien de morts ?*

- Éamon Ó Ciosáin, bet kelenner brezhoneg ha galleg e skol-veur Maynooth en Iwerzhon. Tri levr en deus lakaet embann (gant Alain Le Noac'h) diwar-benn an envroidi iwerzhonat e Breizh e-doug ar XV^{vet} hag an XVIII^{vet} kantved e Breizh. E-touez ar re o doa krouet ar radio e gwezeleg *Raidió na Life* eo bet ivez. Kenlabourat a ra ingal gant ar gelaouenn *Al lanv* (keleier Iwerzhon).

Teir lodenn a zo bet e-kerzh al lid. Goude roidigezh Kolier an Erminig en deus Jacky Flippot, prezidant Skol Uhel ar Vro, roet medalennoù d'ar C'hatalan Aureli Argemi I Roca, ur pennlusker evit gwirioù ar pobloù, ar yezhoù hag ar sevenadurioù bihanniver ; da Jakez L'Héritier, stourmer breizhek war veur a dachenn e Bro-Sant-Nazer, ha da bPevarzek, ur gevredigezh bet krouet e 2023, levezonet gant doareoù ober ar *Seiz Breur*.

Tost ouzh harzoù Bro-C'hall emañ Argentred-ar-Genkiz, ha Kamp Conlie, anavezet mat, a zo nepell ouzh Le Mans. Riwanon Kervella he deus kinniget an darvoud emgann truezus-mañ bet bevet gant he zad-you-kozh e 1870, ha degaset war al leurenn ar penn-bazh a oa bet gant an Tregeriad.

Klozet eo bet al lid gant ar Vro Gozh, evel bep bloaz.

LEVRAOUEG TI AR VRO TREGER-GOUELOÙ _____

Ul levraoueg a zo e Kawan e Ti ar Vro, digor d'an holl. Staliet eo en eilvet estaj ha digor hanter-amzer. Servijoù kinniget : amprestañ, stummadurioù, alioù, diskouezadegoù, dibaboù teulioù,

abadennoù, gweladenniñ. Ur wech ar miz e vez aozet un emgav gant lennerien, kaset en-dro gant Visant Dubois. Ul levr a vez dibabet, ur miz evit e lenn hag eskemmet e-kerzh an emgav.

Anv a zo da serriñ al levraoueg da vat e miz Gouere 2025. Mantrus eo ha gwall nec'hus evit an holl vrezhonegerien, bras ha bihan. Gant ar spi ne vo ket serret levraouegoù all e Aodoù-an-Arvor. War a seblant emañ an departamant o klask krennañ dispignoù zo. Sevenadur ha yezh ar vro a zo lakaet en arvar, ur wech c'hoazh. Levraoueg Ti ar Vro Kawan a zo ul lec'h digor d'an holl ha gouestlet d'an teulioù e brezhoneg penn-da-benn.

Evit gouzout hiroc'h : levraoueg@tiarvro22.bzh – 02 96 49 12 06

DESKIÑ KEMBRAEG E ROAZHON _____

Kentelioù kembraeg a vez kinniget ar bloaz-mañ gant Skol an Emsav evit tud deuet, ul live mat e brezhoneg ganto. Kaset int en-dro gant Ffion Reader, kembredez, brezhonegerez ha tik gant ar yezhoù. Labourat a ra e Skol-veur Roazhon 2. D'ar 7 a viz Du e vo roet lañs d'ar c'hentelioù.

Mont e darempred gant Skol an Emsav – 8 trolec'h Sant-Albin – 35000 Roazhon – 02 99 38 75 83 – skolanemsav.bzh

MARCELLE HAG ANJELA E SANT-ERVLAN _____

Enor da ziv varzhez o deus bet skrivet ha stourmet evit o yezh, hag o div o labourat douar. E 1964 e oa bet embannet « *La Lenga que tant me platz* », kentañ barzhoneg Marcelle Delpastre. Hag amañ e Breizh, koulz lâret d'ar memes mare, e kaved ur skrid gant Anjela Duval er gelaouenn *Ar Bed Keltiek*. Ober a reer anaoudegezh gant oberennoù ha buhez an div varzhez diwar ar maez.

Digor eo an diskouezadeg e Kreizenn Dafar Sevenadurel Keltiek, e Sant-Ervlan, etre an 10 a viz Here hag an 20 a viz Kerzu 2024, eus al Lun d'ar Gwener, etre 9e30 ha 5e gm.